

Kelenn ar roue sant Salomon

- Selaouit gant eur spont gwirion
 Kelen vad ar roue Salomon ;
 Skrivet-hen doun enn ho spered
 ha biken ne rafet pec'hed.
- 5 Red eo mervel, evel eunn tenn,
 mont rak ar barnier soueren [*sic*],
 Goude 'r maro eur varn spoutuz,
 mont d'ar c'hloar pe d'ann tan paduz.
 Ar pezh zo koz, ma ren er bed,
- 10 Etouez pep seurt tud ar pec'hed,
 eo a boan e kaver unan
 a zonch enn he fin divezan.
 Rak ar c'horf, hervez he natur,
 ne glask nemert he blijadur,
- 15 ha koulskoude ember hep mar
 ez ai da vreina enn douar.
 ar c'horf a zo enn pep fesoun
 pitoul ha kunv, vel tud mignoun.
- Goude beza bet re vaget,
 20 e vo d'he dro boued d'ar prened.
 ar bed-man a zo ken treitour,
 'vel eur bluen war ann dour ;
 ann nep en em fio enn-han
 a vo hep mar faziet gant-han.
- 25 Laret a ra e roi hir vuez
 d'ar re a zo war bord ho bez,
 ha d'ar re iac'h ne glanfont ket,
- ha d'ar re glanv deuont enn iec'hed.
 na lakit ket ho kalounou
- 30 er bed-man da zestum madou,
 rak madou pa vent dastumet,
 ne d-int netra nemet maged.
 goude m'ho po en em lazet
 evit dont pinvidik meurbed,
- 35 Petra ho po evit ho poan
 pa zefoc'h diwar ar bed-man ?
 eur goz linsel, pevar blanken,
 eunn dorchen blouz dindan ho penn.
 Setu eno ho tigevez, den,
- 40 evit ho madou n'ho po ken.
 na fiet ket enn ho iec'hed,
 Enn iaouankiz nag enn gened.
 'r maro zo kre hag a ziskar
 ar re nerzusa d'ann douar.
- 45 ne hell brasder, galloud ebet,
 madou, na noblanz, na gened
 tec'het lezen griz ar maro :

ho falc'hat a rai pa garo.
 sonjit eo erru ar maro,

Avis du roi Saint Salomon

Ecoutez avec une crainte profonde,
 Les sages avis du roi Salomon.
 Gravez-les profondément dans votre esprit
 et jamais vous ne pécherez.
 Il faut mourir promptement, comme un éclair,
 aller devant le souverain juge,
 après la mort un jugement redoutable,
 Aller à la gloire ou au feu éternel.
 Si ce qui est vieux, ne règne dans le monde,
 c'est le péché parmi toutes sortes de gens ;
 que parmi eux on trouve à peine un
 qui pense à sa fin dernière.
 Le corps, selon sa nature,
 ne cherche que ses agréments,
 et cependant tantôt, sans nul doute,
 il ira pourrir dans la terre.
 Le corps est, de toute manière,
 délicat et sensuel, comme des gens élevés sans
 mal ;

Après qu'il aura été trop bien nourri,
 il servira de pâture aux vers.
 Le monde est aussi changeant
 qu'une plume sur la surface de l'eau.
 Celui qui aura foi en lui
 sera par lui assurément trompé.
 Il dit qu'il donnera longue existence
 à ceux qui penchent vers leur tombe
 à ceux qui se portent bien, qu'ils n'auront pas
 de maladie ;
 aux malades que leur santé se rétablira.
 Ne vous portez point de coeur
 à ramasser des richesses en ce monde,
 les richesses amassées
 ne sont que fumées.
 Quand vous vous serez tué
 pour devenir immensément riche,
 Qu'aurez-vous de toutes vos peines
 lorsque vous quitterez ce bas monde ?
 un mauvais drap, quatre planches
 un peu de paille sous la tête.
 homme, voilà votre héritage ;
 vous n'aurez autre chose pour votre richesse.
 Ne vous fiez pas dans votre santé,
 dans votre jeunesse, dans votre beauté.
 La mort est forte et abat
 Les plus vigoureux.
 ni grandeur, ni puissance
 ni richesse, ni noblesse, ni beauté
 ne peuvent échapper à la loi cruelle de la
 mort.

La mort les fauchera quand elle voudra
 pensez que la mort accourt,

50 ma e kichennik ho seulio.
 ha ne hellit ket dale pell ;
 en em rentit evit mervel.
 Goude ma viot hu tremenet,
 ho kerent hag ho mignouned
 55 ho kaso holl da doull ho pe ;
 eno ho lesfent goude-ze ;
 eno ivez e finvezo,
 ho sked, ho joa, ho pombanso ;

eno n'ho po mignoun ebet,
 60 nemert tign, kountroun ha prened.
 sonjit eta mad enn traouze
 epad m'emoc'h c'hoaz e bue ;
 ha pa z ai ho korf d'ann douar,
 hoc'h ene a ielo d'ar c'hloar.

elle est déjà sur vos talons,
 Vous ne pouvez plus lui échapper long temps
 Disposez vous à mourir.
 Quand vous serez trépassé,
 vos parents et vos amis
 vous conduiront à votre fosse
 et vous y laisseront après eux.
 Dans la tombe finiront
 votre éclat, votre joie, toutes vos bonnes
 chères,

Dans la tombe point d'ami
 que la teigne, les vers et la pourriture
 pensez donc sérieusement à toutes ces choses,
 tandis que vous vivez encore,
 Afin que lorsque votre corps ira dans la terre,
 votre âme aille à la gloire.